

# AR SPILLEN

---

## I

Ia ! gant eul loummad guin guen  
Betec anter va gueren.  
Var beg eur spillen e rafen  
Eur zôn keit hag eur goalen.  
Setu va loummad guin evet :  
Setu va zôn commanset.

## II

Pourmenit dre an oll broïou,  
E peb leac'h e zeuz spillou :  
Spillou aour, spillou arc'hant,  
Spillou aliez livet-koant ;  
Ha spillou bras ha spillou cren  
Spillou du, spillou melen.

## III

E peb stad hag e peb amzer  
Ar spillou zo necesser :  
D'ar varkizez, d'ar Rouanez  
Ha d'ar baour-kez artizanez  
En noz kercoulz hag en deiz,  
Er gozni, er iaouankiz.

## IV

Pa za Jannet d'ar pardonïou  
Ractal e clask he spillou,  
En he c'hoef e laca peder  
Ha teir en he mouchouer ;  
En he berniden e laca  
Spillou, spillou eb kounta.

## V

Deac'h e velen eur bugel  
O clask dibri bigerniel :  
« Del, paotric, kemer eur spillen  
Ha goudeze gra evelhen.  
— Olla ! eme ar paotr laouen,  
Bebet begic ar spillen !

## VI

Ma chom gant an dud avechou  
Ho buez hag ho madou,  
A gement-se int dleourien  
Aliez da veg eur spillen.  
Ha setu ama eur breuven :  
Bebet begic ar spillen !

## VII

'Kreis an noz attaket, an den  
A gemer eur bistolen.  
Chatt ! Stanket eo toul an oalet !  
E distanka eta 'zo ret !  
Petra a lamo he anken  
Nemet begic ar spillen ?

## VIII

Eur c'harrer a raio eur c'har  
Hag eur c'halvez eun alar :  
Mæs evit ober eur spillen  
E zeo ret kavout pevar den !  
Meur a hini a zebr bara  
Ha ne oar ket an-dra-ma.

## IX

Unan a daill troad ar spillen  
Eun all a eün he guimpen  
Gant eul letoun en dro d'he fen  
Eun all a ra he c'hurunen  
Eun all gant he vean-higolen  
A lemm begic ar spillen.